

Charlez ar Braz (Drouiz Karaez)

(Ar Hastell-Nevez 1860 – Karhaez 1936)

Bet mestr-skol.

War an delenn an abardaez

Da D/Taldir
hag Abalor (L. Le Berre)
va daou baeron euz ar Gorsedd

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Gwechou 'zo e laka reiz an anoïou-kadarn evel ar ger e galleg. Reizet eo bet ar faziou-ze.

Kenskrid

Eur skolaer breizad

Evid kaoud, en deskadurez Kenta Pobleg, eur skolaer all damheñvel eun tammig ouz oberour War an Delenn, An abardaez, red eo pignad beteg Yann-Vari ar Yann, ganet e Plounerin en 1825, mestr-skol pobleg en Log-Envel, en Tredarzeg, en Gwengamp, leh e kentelie er bloavez 1870. Yann Vari ar Yann eo an troer e brezoneg euz geriou an **Diou Vreiz** gand Thielmans, bet kanet en kendalh keltieg Sant-Brieg en 1867, hag euz **Parosian Roman** ar mouller Vatar, a Roazon, a oa losket ar moulladur anezi e-kerz an tangwall a strakas en ti-ze. Ar Skolaer-Barz-se a oe mignon a galon L.-P. Ar Skourr, hag ezel e oe euz Breuriez Barzed Breiz en 1860.

Mar gra, evel ma leverer, rouester eun dra e briz, ar Skolaerien Bobleg a ouestl o skiant d'ar brezoneg a dle beza karet ganeom, rag ped emaint ? Kement tra vez greet, a reer dre du, gwir eo, hogen kentoh, a gredom, dre ar helenn kenta. Ahanta, sklêr eo ar Skol Normal a zsitaol a-ratoz-kaer pep kelennaduruez digreizeg, me 'fell din lavared na zeu ket diouz ar hreiz, hag ar hreiz eo Pariz.

Penaoz 'ta eo deut Charlez ar Braz da veza eun den lenneg tuet war ar yez ? Daoust hag e vefe abalamour n'eo ket tremenet dre ar Skol Normal ? Respont ne gredom ket, rag bez' ez eus da vihanna unan e-touez mistri Skol Normal Kemper, an Aotrou Fañch ar Menez, hag a lavar ema a-du gand deskadurez ar brezoneg¹.

On barz a zo ganet e Kastell-Nevez-ar-Faou en 1860. E dad, genidig a Blestin-an-Trêz, a oa mestr-skol eno. Euz eun tiegez a 5 a vugale, Charlez a zeskas brezoneg azaleg e oad tenerra en eru redeg ar parkeier en kompagnunez ar gouërien vihan a gare kalz. D'e 12 vloaz, e oe lakaet evel bourser en Kolach Montroulez. An amparta euz ar skolidi e oa. En

¹ ema a-du gand deskadurez ar brezoneg : Dépêche de Brest, 23-1-1930

1877, e oe degemeret Bachelier war ar Skiantchou penn-da-benn.

Charlez ar Braz a zilezas, en despet da beb gortoz, ar Geleennadurez Eileg evid antreal er Geleennadurez Kenta. O veza selaouet e galon e fellas gantañ menel e-kichenn e vamm, a oa sempl he yehed, hag e-kichenn e dad ; goulenn a reas e-tal dezo eur garg a adjoent, a oe roet dezañ.

En 1882, da 22 vloaz, e oe anvet da Rener en Sibiril, goude en Kleder en 1883. Chom a reas 19 vloaz er garg-se. En 1901, Renadurez Keraez o veza goull, Ar Braz a oe anvet eno, ha ne gimiadas ganti nemed evid kemered e retred, en 1918, goude beza bet ar brasa meuleudiou digand e vistri, hag an uhella enoriou akademik².

Charlez ar Braz n'en-deus biskoaz greet fae war ar brezoneg, e-pad 40 vloaz a geleennadurez. Er hontrol, en em zervijet en-deus euz ar yez, bewech ma oa red, evid deski ar galleg. Koulskoude ne zeraouas skriva brezoneg nemed war-dro 1892, pa oa krouet gand Louis Tiercelin, an **Hermine** hag ar **Parnasse Breton**, e-leh ma teredas oll Varzed diwez ar hantved. En eul lenn **Kenteliou a skwer vad** an abad Morvan, rener **Feiz ha Breiz** en 1889, eo e stagas gand studi genta ar yez lennegel. Êsa a reas da genta e-bazr an **Hermine** ha goude e-barz **Ar Vro**, tro 1904. E werziou brezoneg a zo bepred leun a sklêrder hag a oueskter dreist : e Awen a zo atao klaseg, kentelieg : karoud a ra an doare deskeduz, ar vojenn, ar gontadenn, ar zorhenn. Evid lavared gwir, Ar Braz a chom skolaer a-raog, zoken en e werziou. Mar deu d'on yez, deiz pe deiz, mond e-barz an tier-skol, e ranko on bugale vihan deski o henteliou brezoneg el levr **War an Delenn, an abardaez**.

A-hend-all, Charlez Ar Braz a zalh deuz unan bennag. Ha n'eo ket bemdez da Anatol Ar Braz, e reom kañv dezañ ? Evel ar skrivagner brudet-se, en-deus karantez vraz evid Breiz hag heh oll Dreuzlavariou³.

Kement rag-se, en 1927, eun enor e oe da Skol-Veur ar Varzed degemered en he zouez gand ar reñk a Zrouiz, ar Mestr mad-se, en hini⁴ en-doa digoret d'ar sklêrijenn sperejou kalz a remziou Bretoned vihan.

Hirio eo retretet, en-dro dezañ doujañs oll dud Kerhaez, ha karantez konfortuz e vugale hag e vugale-vihan. Charlez Ar Braz a wel 'dreg e gein neudenn hir hent eur vuhez eeun, onest, labouruz, oll konsakret d'an Traou Kaer ha d'an Traou Mad.

Komz a reom en ano e oll genvroiz, en eul lavared dezañ : Kalz a vloaveziou c'hoaz !

Fañch Taldir Jaffrennou.

Notenn : kenderv e oa da Anatole Le Braz.

Notenn : Eur bern faziou brezoneg a zo er skrid orin. Kemmaduriou, reiz an anoiou-kadarn. Levezonet-braz e vez an oberour gand ar galleg. Difazi eo e skrid galleg ! Implijoud a ra "pehini" evel pa vefe galleg. Lakaet eo bet "an hini".

² an uhella enoriou akademik : Kenta Medalenn alaouret, kenstriv an Aval, 1890 ; Medalenn a enor an Diskouezadeg Ollvedeg, 1900 ; ofiser an Deskadurez Poble.

³ Notenn : Dreuzlavariou : Treuzlavariou er skrid orin. "hengouniou"

⁴ Notenn : "pehini" er skrid orin.

Roll ar pennadou

Gwerz Menez Sant-Mikael
Eurejou Kana
Trompiller Verdun
Perig hag ar Roñfl
Kan Skolaerien Karhêz
Son nevez war eun Danvez koz
Kanaouenn Gilleri
Ar gwez-avalou hag ar jistr
Ar Wennilienn hag ar Bugel
Ar vezenn hag ar gaerell
Komz re a noaz
An Alhwerder, heh Evnigou ha perhenn eur Park
Laer laeret
Al louarn hag ar bleiz
Raz ar parkou ha Raz-kêr
Salud digoridigez ar Gorsedd en Uhelgoad

Gwerziou⁵

Gwerz Menez Sant-Mikael

Ton : Petra 'zo nevez e Ker-Iz ?

Da Daldir Jaffrennou

I

Da hedal ma vezo evet
Ar flip a-barz mond da gousked,
Yann, lavarit, mar plij ganeoh,
Marvaillou kaer, 'vel ma ouzoh.

Degasit din 'ta eur skod-tan
Ma tanin va horn hag ez an,
Paotred, merhed, d'ho tisplega
Gwella ma hellin ar werz-ma'.

II

Etre Sant-Mikale ha Konk-Gall⁶
El leh an oad, ez oa gwechall
Meur a barrez eskopti Dol
Dindan ar mor deuet da goll.

En unan ar parrezioù-ze,
Anvet Sant-Vinot, e veve,
Pell amzer 'zo, daou zen nevez,
Loeiz, Madalen, el levenez.

Eñ, Loeiz, a oa eur micherour,
Hi, Madalen, eur plahig flour,
Eur plahig koant, mistr ha kempenn,
Tud evuruz, Loeiz, Madalen !

Eun dra bennag koulskoude 'rank
Teñvallaad tal ar wreg yaouank,
Evel ma ra eur goumoulenn
Glaster an neñv en eur dremn.

Rag bez' he-devoe a-wechou
Leun he doulagad a zaelou,
En kuz da Loeiz, hi, beteg-henn,
A hed an amzer ken laouen.

Abaoe m'oant bet eureujet,
Diou wech 'doa greet al lapoused,
E-harz toenn o zi balan,
O neziou karget a richan.

⁵ Gwerziou : troet e galleg – er pajennoù e-kichenenn – gand eur ger galleg a dalv kement ha "mojennoù".

⁶ Konk-Gall : "Cancale" e galleg.

Ha Madalen, eur mintinvez,
War barlenn Loeiz 'deu da azez',
Ha d'he fried neuze 'lavar
Ar plahig kêz en he glahar :

« Na me 'garfe, en deziou-ma',
Kinnig d'an Intron Varia
Eur ouel... O Loeiz ! mar am harez,
Ganen d'ar chapel e teufes,

Dirag ar Werhez da zaoulin,
Ha marteze e rofe din,
Eun deiz, mar selaou or pedenn,
Da luskellad eun êlig gwenn...

« - Bez da galon heb nehamant.
Ganez ez in, va Dousig koant... »
Emezañ, o pokad dezi
'Vid he daoulagad da zehi.

Madalen 'n em lakaas eta
Heb dale pelloh da vrouda,
Ha Loeiz hag hi, 'benn tri devez,
Ez ajont da gas d'ar Werhez

Eur ouel gaer, broudet, moan ha skañv,
'Vel er prajou talarenn-hañv,
Eur ouel gwennoh eged na vez
An erh war lein Menez Are.

III

Da batronez an Arvoriz,
E tegase, hervez ar hiz,
Oll dud ar vo, gwall beherien,
Kinnigou kaer hag arhant gwenn.

Hogen ar hinnig diweza
Oe gand ar Werhez, pa ne oa
'Vid daspren pehed braz ebed,
Dreist ar re all degemeret.

Hag ar Werhez a vennigas
Mennoz Madalen hag he gwaz
Ha, fin ar bloaz, 'vito, ar hleier
A zonas drant ha skiltr en êr ;

Rag an êlig a oa deuet,
Ha Madalen, oh e zelled
En e gavell war ar bank-kloz,
'Oe 'n he halon ar baradoz.

Nao devez goude 'vadiziant,
Madalen, gand he mabig koant,
He-devoa anvet Gabriel,

A gerzas beteg ar chapel,

Ha d'ar Werhez e lavaras :
« - Intron Vari, deoh me zegas⁷
Ar bugel ho-peus din roet
Hag am-eus deoh gouestlet.

Ho pedi a ran d'e harpa
En dañjeriou euz ar bed-ma',
Ha pa deuio e dremenvan,
On zikourit, O ! Gwerhez hlan ! »

Hag ar bugelig a zavas
Sul ha bemdez gwisket en glaz,
Liou benniget Intron-Arvor,
En c'hwez nerzuz an êzenn-vor.

IV

'N abeg siou tud Sant-Vinot,
Pe an dud dall e-tal an aod,
'Lakaas Doue, en e gounnar,
D'o honfonti ?... Nikun ne oar.

D'an ampoent-se, e-kreiz an noz,
Nozvez enkreuz hag a valloz,
An douar spontet a grenas,
Al loar en neñv en em guzas.

An oabl, freuzet a darziou tan,
A skuillas ar glao heb ehan,
Ha kloh an tour en em lakaas,
Euz heh-unn da zon ar glaz.

Lenn Sant-Vinot disreolet
En eun taol-kont a oe kresket
Hag a goeñvas evel al lêz
Ankounac'haet war an trebez.

D'ar beure, an heol droug-livet
A ziskouezas d'an dud, mantret
Gand an orrol hag an anken,
N'oa ket, siwaz ! ar lenn hepken

Deut da zihlann ha da goeñvi ;
Ar mor ivez, o kounnari ;
'N eur grozal 'deue d'o distruj :
N'oa ket ken ar mor, mez an Distruj !

Neuze 'redejont, kollet o fenn,
D'an iliz da glask goudorenn.
Kerkent hag int, war an treuziou,
E tiredas ar gwagennou.

⁷ deoh me zegas : ereadurez ar galleg. deoh e tegasan.

Hag ar mor yen a asatennas
Warnezo e lianenn⁸ hlaz.
N'oa ken a-wel, war eun dorgenn,
Nemed ti Loeiz ha Madalen !

Pa erruas an tarziou-mor
Oh eonenni war dreuz o dor,
Int a bignas war an doenn,
O bugelig en o hichenn.

Siwaz ! ar mor 'zave atao
Hag a ruillas beteg enno,
Hag, en eur ober sin ar groaz,
Ar paour-kêz mamm a lavaras :

« - Gwerhez Vari, deut d'or zikour !
Ema bremañ warnom an dour !
Ra vezo meulet Doue, Loeiz,
Pegwir 'varvim er memez deiz. »

« -Nann, Madalen. ». « -Petra, 'mezi,
A lavarez d'am glahari ?
Daoust hag-eñ 'hellfes dilezel,
Loeiz ; ha da wreg ha da vugel ? »

« -Nann, emezañ. Sell, Madalen,
N'ez eus mui stroñs gand ar wagenn,
Sioulloh ar mor ha, marteze,
E tiskenno heb re dale. »

« Koulskoude, kreski a ra c'hoaz
Eun tamm bennag. War va diskoaz,
Te Madalen, gand Gabriel
En da ziouvreh, a rank sevel.

Me, harpet mad ouz an doenn,
E vezo din êz ho tougen
Ha mar yafe ar mor en-dro
« Hellfeh tehed diouz ar maro. »

Kalon Madalen en he hreiz
A rannas : « O ! emezi, Loeiz,
Mervel a rin ganeoh ho-taou ! »
« -Nann, Madalen... Red va zelaou.

Evid Gabriel e rankez
Klask beva c'hoaz, va harantez.
Hastom !... N'ez eus mui da dermen...
Eur pok diweza, Madalen ! »

Hag ar reuzeudig⁹ a zentas...
Dioustu an dour a holoas
Penn Loeiz ; hag, o sevel bepred
E kelhas dezi tro he bruched.

⁸ lianenn : liñsel.

⁹ ar reuzeudig : an hini reuzeudig.

Eviti pebez kalonad !
Beuzet e oe he daoulagad
Gand an daelou c'hwero-meurbed
A skuille war o evurusted.

Tremenet en ken berr amzer,
Evel 'tremen eun huñvre kaer,
Evel, en aod, eun nijadenn
Gwelenned¹⁰ a-zioh an tevenn.

Hgag an dour a yee war-greski.
Hi en em nerzas da reudi
He diouvreh skuiz evid derhel
Uhelloh-uhel he bugel.

« Pedom emezi, Gabriel,
Ar Werhez da rei deom skoazell.
E-barz va foaniou tremenet
He-deus atao va dizoaniet.

M'ho salud, Mari, leun a hras,
An Aotrou... » Ar houmm a deuas
War he muzellou da vouga
He hlemm hag he homz diweza.

Oll eo echu¹¹. War ar mor braz
A-benn mar e vez gwelet c'hoaz
Bleo alaouret ar bugelig
Hag e zae hlaz eun nebeudig.

V

Hogen, euz an iliz-parrez,
Ar Werhez, er poent-se memez,
Dre 'r prenest arheg uhella
A dehe kuit d'ar buanna.

Tremen a ree, skañv ha skeduz,
War-zu bro he Mabig Jezuz,
Leun he diouvreh a ginnigou,
Pa welas war ar gwagennou

Eun dra bennag glaz ha melen
O loh, hijet gand an êzenn,
'Vel er parkou blaveola
'Mesk an ed dare a-vrema'.

« -O ! emezi, anaoud a ran
Bugel Madalen hag ez an,
P'eo din gouestlet, heb mui gortoz,
D'e gas ganin d'ar baradoz... »

¹⁰ Gwelenned : gwelini.

¹¹ Oll eo echu : echu eo pep tra.

Hag o paouez da nij¹², buan,
En bleo ar bugelig bihan
E krogas : mez ken pounner 'oa
Ma rankas lezel da goueza.

Ar hinnigou he zamme re
En puñs ar mor don, ha neuze,
O veza, gand kalz a boan c'hoaz,
Dibradet ar hêz¹³, hi 'welas

Petra 'oa o stourm outi :
Bez' he-devoa sachet ganti
Oh an doenn, en eur blokad,
Ar bugel, ar vamm hag an tad.

Rag pep hini euz anezo,
Dre ma zante dond ar maro,
War muioh-mui en em reude
Da zerhel stard en egile.

O selloud ouz heveleb tra :
« -Doue e-neus greet ar bed-ma',
Eme ar Werhez karantezuz,
Traou kaer-meurbed ha dudiuz ! »

Hag ar Werhez, laouennaet-braz,
'N eur vouse'hoarzin a gemeras,
E-barz eur pleg euz he mantell,
An tad, ar vamm hag ar bugel.

Teir garantez 'r memez hini,
N'eus 'med eun ano eviti,
"Ar Famill". Benniget ra vo
War an douar 'vel en neñvo' !

*

Hag abaoe an amzer-ma'
An heol, pa zao, 'zeu da bara
War leoiou trêz pe mor uhel
Tro-war-dro Menez Sant-Mikael.

¹² nij : nijal.

¹³ : ar hêz Gabriel.

Eureujou Kana

D'Abalor (Leon ar Berr)

I

Santez Mari, en amzer-ze,
Ha Sant Jozef a zistroe
War-zu o hêr, Jezuz ganto,
Euz o beaj, skuizet-marô.

Deuz an Ejipt, 'vid mond d'o bro,
'Oant partiet tri devez 'zo,
Hag e kerzent, behiet-meurbed
Gand an tommder hag ar sehed.

Ha ne jome, siwaz ! takenn
Er zeier war gein an azen,
Er seier-ler o-doa leuniet
A zour, an deiz m'oant partiet.

Hogen eienenn e nebleh
Ne darz e-barz ar goueleh,
Hag e seblante ar blenenn
War muioh-mui en em astenn.

Jozef a zelle tro-war-dro
Mar deufe eur sikour dezo
'Pad ma roe ar vronn Mari
D'he mab bihan en eur bedi.

'Benn ar fin, o tond war o zu,
E kredas gweled eun tarch du
'N em zistaga war an trêz gwenn,
Ha diou, ha teir... deg... hag ouspenn.

Eun nebeud amzer goude-ze,
O houzoud¹⁴ mad petra 'oa se,
Laouen, e lavar d'ar Werhez :
« - Doue, ouzom 'n-eus bet truez.

A-dra-zur, bremañ me a wel¹⁵
Eur haravan 'zo en dremmwel.
He gweled a ran o tostaad a-grenn,
Ha prest ez eom d'he diarbenn. »

Ha Sant Jozef pa 'n em gavas
Ar haravan a lavaras
Da beb unan a dremene :
« -Va zelaouit en an' Doue.

¹⁴ O houzoud : fazi bet greet a-viskoaz. Pa ouie

¹⁵ bremañ me a wel : ereadurez ar galleg. Bremañ e welan.

En an'Doue, deut d'or zikour ;
Roit deom eur bannahig dour. »
D'e bedennou, bepred, siwaz !
Peb Morian a respontas :

« - Tud kêz, on dour a zo dister,
Hir on beaj. Or zeier-ler,
Gweled a rit, 'zo a-vrema'
Hanter goullo. N'hellom netra. »

Chom a ree c'hoaz c'hweh dremedal
Eur pennad war-lerh ar re all,
Hga o-doa an dud a zougent
An êr da veza tost kerent.

Ha Sant Jozef en braz anken,
D'an hini kosa ar vandenn,
Eur wech diweza a lavare :
« Eul lommig dour en an' Doue ! »

Ar Werhez Vari heh-unan,
He daouarn kroazet dirazañ,
'Lavare : « Prest om da vervel ;
Ho-pet truez ouz or bugel ! »

Hag an den-mañ a oa o vond
D'ober dezo memez respont,
Pa reas dezañ 'r Mabig Jezuz
Eur mousc'hoarz dous ken azeuluz.

Ma santas e galon teuzet
A garantez hag a respet ;
Hag e teuas, hep kaozeal,
Da ziskenn deuz e zromadal.

Hag o stoui war e zaoulin
E salud ar Mabig divin.
Distaga 'ra oh an dibr¹⁶,
Karget a zour, daou zahig ler.

War gein an azen o lakaas,
Ha war e loen eh adsavas
'N eur lavaroud : « Tapom buan,
Va bugale, ar haravan. »

'Pad ma lavare ar Werhez :
« Mil bennoz deoh, ha trugarez !
Asur, va mab, eun deiz a vo,
Euz ho madelez ho paeo. »

II

¹⁶ an dibr : "an diber" er skrid-orin.

Tremenet 'oa tregont bloavez,
War-dro, abaoe an devez
'Roas ar Morian skoazell
Er goueleh d'ar Famill santel.

Deut e oa bremañ an amzer
'Vid Jezuz da guitaad ar gêr
Ha, dre bevar horn an avel,
Mond da brezeg e aviel.

Ha dre-oll en e veajou,
War ribl ar mor hag al lennou,
Dre ar blenenn, war ar mene',
'Roe da gleved komz Doue.

Hag oh e zelaou, e sante
Ar paour-kêz tud, ar re¹⁷ 'veve
Beteg neuze 'barz an enkreiz
En o halon al levenez.

Sant Jozef n'oa ken er bed-ma'
Ha Santez Mari he-devoa
He zi Nazareth dilezet
Evid heulia he mab karet.

Evid heulia he mab Jezuz
E tlee, o ! mamm druezuz !
Eun deiz da zond, siwaz ! gouela
War lein menez ar Golgotha.

Dre ma'z eent, o-daou, eta
Emberr du-hont, emberr ama',
En em gavjont, eun deiz a oe,
En kêr Kana, er Galile.

Ha tud euz ar vro a deuas
D'o fedi d'ober deze ar hras
Da gemer perz ganto er pred
A oa aozet 'vid an eured.

Jezuz ha Mari a chomas
D'ar fest. Hogen e tegouezas,
A-raog m'oa deut ar pred d'e fin,
War an daol, da vankoud ar gwin.

Mari, kement-se o weled
War-zu Jezuz 'zo distroet :
« Gweled 'rit-hu, euz an tu deho'
D'an dud nevez, gwenn-kann e vleo

Ha dous e zellou, eur hoziad ?
Euz ar wreg yaouank eo an tad,

¹⁷ ar re : "pere" er skrid orin.

Hag hennez eo ar Morian
On zikouras er goueleh-tan.

Ar picherou a zo goullou ;
N'eus ken a win da skuill enno,
Ha, 'benn warhoaz, ar goaperez
A vezo war an tiegez.

Na c'hwi 'pefe ar vadelez
Dond da espern kement a vez,
Evel m'ho pedan, emezi,
D'ar hanvaler d'an hini¹⁸

Em-boa prometet, an devez
Ma'z oam e-barz an dienez,
Penaoz eun deiz e vije bet,
Va mab, ganeoh-hu gopraet ? »

Ha Jezuz , en eur vousec'hoarzin,
A respontas d'e vamm divin :
« N'ho-pezet nehamant ebed,
Ho promesa 'vezo dalhet. »

Neuze, d'ar re 'oa o servij,
Mari a lavaras : « Mar plij,
Selaouit mad ha grit dillo
Ar pez va mab a lavaro. »

(Eno e oa c'hweh laouer-mên
A zervije d'ar Judevien,
Beb bloaz, pa deue an devez
D'ober gouel ar Hlanidigez).

« Kargit gand dour euz ar feunteun
Al listri-mañ. Pa vezint leun,
Kasit raktal war an taoliou
Ar pez a vo el laoueriou.

'R memez amzer, c'hwi a gaso,
Eme Jezuz, e giz ar vro,
D'ar mestr-ostiz eur hanafad
'Vid ma welo mar ez eo mad¹⁹. »

Pa 'n-doe ar mestr-ostiz evet
Ar pez 'oa dezañ kinniget,
D'an dud nevez e lavaras
Penaoz e oa souezet-braz.

« D'ar hustum e roer bepred
Da genta, da dud an eured,

¹⁸ D'ar hanvaler d'an hini: ar hanvaler : an hini a ya war eur hanval ; d'an hini : da behini er skrid orin.

¹⁹ mar ez eo mad : galleg. Ha mad eo ?

Ar gwin ar gwella, emezañ,
Mez c'hwi ho-peus, 'vel a welan,

C'hwi ho-peus roet ar wech-mañ
Ar gwella gwin da ziweza. »
Ar zervijerien, a-drekañ,
A zerede : « Setu amañ,

Emezo, an dra vuzuduz
'Zo degouezet. Dre urz Jezuz,
Ni on-doa karget a zour sklêr
Al listri-mañ, ar c'hweh laouer.

Hag an dour 'zo en em droet
Kerkent ar gwin ho-peus evet. »
Hag an oll 'oa e-barz ar zal
Chomas boemet a gemend-all.

Hag an dra-mañ, tud vad, 'zo bet
Eun devez eured erruet,
Euz Jezuz ar burzud kenta,
En Galile, en kêr Kana.

Trompiller Verdun

D'an Doktor Marchais, en eñvor euz e vab Loeiz, maro war an dachenn a enor.

I

Tostait, tud a Vreiz-Izel,
Ha dirazoh, e vouez uhel,
Ez an da gana eur werz kaer,
Maro eur zoudard trompiller.

Hag an dra-mañ, e-pad ar bloaz
Naonteg kant c'hwzeg, 'erruas
Dirag kêr Verdun seziset
Gand mab Gwillou ar Milliget.

Gwallgaset gand ar Frañsizien,
Ar Brusianed, war pep tachenn,
Vaux, Douaumont, Fleury, bepred
'Oe trehet gand on zoudarded.

Dre ne hellent ken enebi
Gand lealded oh on re-ni,
Evel bleizi en o zoullou,
En em guzient e trañcheou.

Eno reent gaziou marvel
Ha, pa skoe eur barr-avel
Tu or linennou, war on tud
E tistaolent o gaziou pud.

Mez or zoudarded, war evez,
N'en em gavent nemeur diêz :
Kelennet gand ar hedourien
E lakaent maskou war o fenn.

II

Dirag Verdun ez oa eta,
En trañcheou linenn genta,
Zouaved o hedal ma teufe
Ar Brusianed da zaill warne,

Pa zegouezas ar habiten
En eur youhal a-bouez e benn :
« Paotred ! tapit prest ho maskou,
Warnom e teu kourmoul gaziou. »

Hag ar habiten a rede
D'orjellavaroud²⁰ heb dale
D'an ofiser euz eur rumm all
Teuler evez d'ar houmoul fall.

²⁰ orjellavaroud : ger ijinet gand an oberour, diwar ar ger "orjal" : da defefoni.

Pebez ranngalon a grogas
Er habiten ha pa welas
Ez oa trohet an orjalenn !
Penaos kelenn re ar vandenn

A oa war-lerh tro c’hweh kant paz ?
Hag ar re²¹ ne zoñjent biskoaz
E vije warno ar gaziou
A-raog ma lakjent o maskou !

Ha, kas dezo eur helenner,
N’oa ket da zoñjal d’hen ober,
Rag ar houmoulou droug-livet
A-vremañ a zo erruet.

Hga en eun taol-kont ar houmoul
War an drañche ‘goueze a-boull,
Pa deuas da zevel souden,
A-grenn tost ouz ar habiten

Eun den kaloneg ‘mesk an dud
Muia kaloneg. ‘N eur zin mud,
Hen kourajas²² en e anken
En eur rei dezañ da gompren

Penaos n’oa ket kollet ar stal,
Ha penaos e ouezfe raktal
Ober d’e vreudeur en dañjer
Kleved an arouez savetaer.

En e galon tan an aberz,
‘N em ouestl d’ar maro, ha, gand nerz,
(Astraf harozuz²³, dreist-human !)
E stlap e vask pell dioutañ.

Kas ‘ra e drompill d’e henou
Hga, o starda e vuzellou,
‘Vid ma vezo klevet a-bell,
E son, e son kement ma hell,

Hag e drompill troet a-benn
D’an eil trañche ‘vid he helenn
A-dreuz an êr, e kas dezi
Euz an “Alerte“ ar zoniri.

Da genta ar zon a zave
Sklent ha skiltruz, hag a greske,
Mez prestig muioh-mui izel,
‘Teu da goueza ha da vervel ;

Rag an trompiller a zante

²¹ ar re : “pere“ er skrid orin.

²² Hen kourajas : e galonekaas.

²³ Astraf harozuz : n’eo ket bet implijet ar ger “astraf“ gand e ster gwirion. Amañ e talv kement ha “jestr“.

An êzenn flêriuz a lonke
Diskenn en e houzoug devet
Beteg e vouzellou gweet.

Neuze, mouget gand ar gaziou,
E drompill stard war e henou,
An trompiller a oa kouezet ;
Mez ar re all 'zo saveteet !

Kouezet ez eo war an dachenn.
Ra vezo meulet da viken !
Soudard maro en merzer-meur
Evid ar Vro hag e Vreudeur !

Perig hag ar Roñfl

(Istor gwir)

D'an Dimezell Nathalie de Volz-Kerhoent (Genfrewi).

I

Bemdez, beteg an noz azaleg ar mintin,
O kan hag o sutal, Perig ar paotr lirzin,
A rede dibreder a-dreuz ar brouskoajou,
A-dreuz al lanneier, ar parkou, ar prajou.

Eun devez e soñjas 'vefe dezañ ebat
Moned d'ober eun dro du-hont war-zu ar hoad
Deuz an hini²⁴ en-doa klevet komz a-wechou
Evel deuz eur vro gaer leun a wez, a vleuniou,

Bro dañjeruz ivez... « N'eus forz ! koust pe gousto,
« Eur wech, da vihanna, d'he gweled me yelo²⁵ »,
Emezañ. Ha setu, eur mintinvez, Perig
A gerz, laouen ha skañv, pell euz e lochennig,

El leh en-doa bevet beteg-henn evuruz.
Dre ar gwenojennou bordet a vrugou ruz,
Ha dre veur a hent kleuz e redas hep paouez
Beteg ma 'n em gvas en hent e hoantegez.

II

Ema e-barz ar hoad. Evnigou a richan,
Gwenan, balafennou a nij en-dro dezañ ;
An deliou a hiboud, hijet gand an êzenn,
Ha Perig dudiet a gan e ganaouenn.

Souden, 'mesk ar hlazenn 'welas eur wazig koant
Dindan ar gwez o lintra 'vel eur ruban arhant,
Ha kerkent war he ribl 'ma Perig deredet,
'A blegas 'vid eva, hag, e zehed torret,

Eh adsave... Siwaz ! na pebez tra euzuz
A zo 'ta c'hoarvezet ? Eur jigant braz spontuz
En e graban serret a zalhe ar hêzig.
Ha kaer en-doa lakaad e nerz, ar reuzeudig,

Evdi êsaad tehed, ar jigant hen lakaas,
En desp't d'e glemmou, 'n eur zah an hini²⁶ daolas
'N eur hoarzin, war e chouk evid distrei d'ar gêr.
Dor an ti digoret, e ten euz ar zah-ler

Perig spouronet oll hag a gren o weled

²⁴ an hini : "pehini" er skrid orin.

²⁵ d'he gweled me yelo : galleg. d'he gweled ez in.

²⁶ an hini : "p'hini" er skrid orin.

Tri baher²⁷ o rosta dirag tan an oaled
'Vid koan ar roñfl. Ha Per, er gwel a gement-ma',
A gredas degouezet e zevez diweza.

Nde oe ket koulskoude lakaet dioustu da fall,
Ar jigant e zerras e-barz eun tour teñval,
E foñs eur prizon yen, klozet c'hoaz tro-war-dro
A varennou houarn, hag e laoskas eno

Gaznd eur skudellig dour hag eun tamm bara seh.
Mez Perig ne zoñje, o tizesperi teh,
Nemed da hirvoudi. Siwaz ! en eur ouela,
E halve ar maro da zond d'e zieuba.

III

Chom a reas eno eun devez hir-meurbed
O 'n em adeñvori an amzer dremenet,
Ar hleuziou goloet a leton hag a van,
An edou alaouret a-zindan an heol splann,

Hag ar prajou bleuniet, ar roz, an eienenn
A darz ken sklêr etre ar reier en draonienn,
Ar stank a lugern 'dreg ar brankou kelvez,
'Leh en em gibelle deuet an abardaez ;

E lochenn pallennet gand an ilio... du-ze...
O ! na pell ez eo 'ta ar baradoziou-ze ?

IV

Koulskoude, 'n deiz war-lerh, ar jigant a deuas
D'e weled ha, dioustu, dezañ e lavaras :
« 'Barz ar hoad da glevis o kana a-bouez-penn
Kanaouennou ken brao. Da gleved e karfen.

Kan evel er hoad ! » Daoust hag en eur prizon,
E helle c'hoaz kana pa ranne e galon ?
Dre ma tave, ar roñfl, gand eur vouez kounnaret,
'Lavaras adarre : « Kan 'ta !... Ne houllez ket ? »

« Gortoz !... » Hag en eur gomz evel-se e sachas
Perig, ar reuzeudig, er-mêz hag e hejas,
Oll bronduet e gorv ha dija o ronkal²⁸.
« Ha kana a ri 'ta ? », emezañ, eur wech all ?

« Mar ne zantez, ez an... ». Neuze Per a daolas
Eur youhadenn skrijuz 'n eur êsaad tehed c'hoaz ;
Ober 'reas eul lamm, hag e kouezas maro,
Evid peurechui e avantur garo.

V

Ahanat ! bugael, n'hoh-eus ket divinet

²⁷ baher : prizoniad.

²⁸ ronkal : ronkella.

Ez oa Per eul lapous ? ar Roñfl en-doa tapet,
Deuet da veza bourreo, eur paotr fall digalon !
Bugale, er hoajou, rediv a-greiz-kalon

Dindan bolz ar gwez glaz, war ribl ar gwaziu sklêr ;
Lakit en bokejou bleuniou 'n nevez-amzer ;
Kit da gutuill sivi, ha lus, ha mouar du ;
Kemerit diduell ha rediv a bep tu ;

Mez elzit en e goad, m'ho ped, en an' Doue,
Ar paour-kêz lapousig da gana en librente'.
Petra 'vad a ve deoh, pa 'pezo e dapet,
Hen derhel goude-ze klozet en eur gaoued ?

Petra rafoh gantañ ? Siwaz ! eur hoariell
An hini²⁹ a houzañv hag a deu da vervel.

²⁹ An hini : "Pehini" er skrid orin.

Soniou

Kan Skolaerien Karhêz

D'an Doktor C. Menguy (Paotr Goelo).

I

Pegement e kar, pesketaer Arvor,
E vag luskellet war ar gwagennou,
En êzenn-vintin, ken mistr pa zigor
He goueliou gwenn-kann evel askellou !
Ha den ar mêziou ken kaled d'ar boan,
Klaoneg, ha kreñv evel eun dervenn,
A drid o weled, dindan an heol splann
An ed o lintra evel aour melen.

Paotred ar mêziou, paotred an tevenn,
Gwelloh desket, ni a ouezo gouren
'Eneb an avel ha kounnar ar mor,
Labourad gwelloh douar an Arvor !

II

Tud Arez a gar bleun o lanneier,
Al lann sklêr a red e ribl an draonienn,
Hag an heñchou glaz e-leh ma klever
Euz merhed Kerne ar zoniou laouen.
Ha re an Argoad, pell euz o lochou,
Diskarerien gwez, boutaouerien koad,
An rankfe mervel evel evnigou
Heb neiz, dianket er-mêz euz o hoad.

Paotred an Argoad, paotred an Arez,
Ni a lakaio an deskadurez
En or penn Breizad, kaled 'vel ar roh,
An deskadurez 'ra an den gwelloh !

III

Mez ar Vreiziz-mañ, mar dint ken tener
'Vid korn benniget euz bro o zadou,
A zo, a-hend-all, o ! Frañs ! paotred taer
Prest da skuill o gwad war an tachennou.

Ha, pa deu warnom an enebourien,
Oll emaint war zao en-dro d'az panniel.
Mar kouezont ez eo gand ar youhadenn :
« Kent eged traisa, ni a oar mervel ! »

Skolaerien an aod hag ar menezioù,
Euz ar parkeier hag euz ar hoajou,
Evid Frañs ha Breiz eo e labourom ;
'Vite e vevom ; 'vite a varvfom !

Euz ar Republik, Grenadour Kenta,
 Enor Karhêz ha Breiz penn-da-benn,
 Da zeiz an darvoud, ra deuy da bara,
 O ! Malo Corret, da skeud war or penn !
 Ha war-zu ar Gwell, kerzom heb ehan,
 Ni heulio da skwer, o ! Republikan
 Ken braz ! maro war an dachenn enor.

Dit an Tour d' Auvergn, en da gêr Karhêz,
 Leh 'tered ar bobl leun a levenez,
 Evid dezi da ouel 'kinnigom ar zon
 A ganom hirio deuz a-greiz-kalon.

Notenn : Ar han-mañ a hell beza anvet : "Kan skolaerien Breiz-Izel ; den eur
 gemer, el leh an diskan diweza, an diskan amañ war-lerh :

Kemmadenn
en diskan diweza evid an eil penn-ano

An Tour d' Auvergn, euz an hini³⁰ an ano
 Ken brudet a zo skignet e peb bro,
 En da eñvor eo bet savet ar zon
 A ganom amañ euz a-greiz-kalon.

³⁰ an hini : p'hini er skrid orin.

Son nevez war eun Danvez koz

(Ton pobluz)

Me am-eus eur vestrezig en Penn-ar-roz (*diou wech*)
Hag e redin d'he gweled heb mui gortoz,
Hag e redin d'he gweled disul d'an noz.

Ha mar deuez d'am gweled, va hloareg koant,
Me 'n em droio en eur pesk er ster Arhant³¹.
N'e-pezo ket va halon hervez da hoant.

Mar 'n em droez en eur pesk en eur pesk, 'vel ma larez ;
Me 'vezo pesketaer ; o ! va mestrez !
Me 'basketo va Dousig dre garantez.

Mar deuez d'am fesketa ha d'am spouron,
Me 'n em droio en heiez er hoajou don.
N'e-pezo tamm, kloaregig, euz va halon.

Mar 'n em droiez en heiez, 'vel ma larez,
Me a vezo chaseour, o ! va mestrez !

Mar deuez d'am chaseal, 'risk d'am muntri,
Me 'n em raio leanez 'n eun abati.
N'e-pezo ket va halon, o ! kloareg kri' !

Mar 'n em raez leanez, 'vel ma larez,
Me a yelo da vanah, o ! va mestrez !
Me 'goveso va Dousig dre garantez.

Ha mar deuez d'am hoves, 'oueli c'hwero,
Gwenn-kann maro em gwele te am havo.
'Roin ket dit va halon, kaer az-pezo.

Mar da gavan gwenn-maroc'h 'n da wele-kloz,
Plas Sant Per a gemerin er Baradoz
D'hen digeri d'am Dousig euz Penn-ar-Roz.

³¹ er ster Arhant : ano ar ster.

Kanaouenn Gilleri

D'am Mestr Skrivagner, Auguste Dupouy.

I

Bez' ez oa eun denig, e ano Gilleri,
A yeas da chaseal eun deiz ar hlujiri.
Pignet war eur wezenn 'vid selled ouz e gi,
Ar Brank, dindan e bouez, a deuas da derri.

War an ton tra, la, la,
War an ton tra, la, la,
War an ton tra, deri dera
Ha tra la la.

II

Ar brank, dindan e bouez, a deuas da derri.
Kouezet war al leton, ar paour-kêz Gilleri
'N-eus diaozet e vreh ha diwadet e fri.
Intronezed euz kêr 'zo deredet d'e gri.

War an ton tra, la, la,...

III

Intronezed euz kêr 'zo deredet d'e gri,
Unan gand eur palastr hag eben chalpi' ;
Unan all a zouge skudell ha torch-listri ;
Aozet 'oe prest e vreh ha torchet brao e fri.

War an ton tra, la, la,...

IV

Aozet 'oe prest e vreh ha torchet brao e fri.
'Vid o zrugarekaad, va homper, 'n eur hoari,
A bokas deze o-zeir, e galon o vervi,
Hag amañ eh echu kanaouenn Gilleri.

War an ton tra, la, la,...

V

Hag amañ eh echu kanaouenn Gilleri.
Kanaouenn 'zo bet greet, va zud vad, d'ho teski
Penaoz 'oar ar merhed para eur gouli.
Na zaleit ket 'ta, paotred, da zimezi.

War an ton tra, la, la,
War an ton tra, la, la,
War an ton tra, deri dera
Ha tra la la.

Ar gwez-avalou hag ar jistr

D'am mestr Charlez ar Govig.

N'o-deus aon ebed, ar gwez avalou,
Na demeuz ar skorn, an erh nag ar glao.
Pa yud an avel a-dreuz o brankou,
Evid luskellad, 'zoñjont da zistro
An nevez-amzer a zegase de'
Êzennou Ebrel, an heol benniget,
Ha, gand ar bleun fresk, an deliou neve',
Kan al lapoused.

Kanom a vouez uhel
Gwez-avalou on bro,
'Zo goeñv ha kreñv evel
Gwez kelenn ha dero.

Hag o brankou goeñv a blego dindan
Pouez ar frouez, ar frouez melen,
Evid o hinnig, en hañv, da zistan
Kornailenn dizeh an dremenerien.
Pa'z aint d'o dastum, matez ha mevel,
Er memez aval 'grog pep hini
En eur vousec'hoarzin, o ruzia evel
Avalou api³².

'R gwez madelezuz koulskoude 'viro
Avalou a-vern evdi ar waskell.
Pa vo tremenet amzer gwenn golo³³,
O dour³⁴ broustaho. Klevit, an donell
A drid hag a gan son ar jistr nevez,
Ar jistr hag a skuill da neb hen tañva
Etre mignoned, e-barz eur banvez,
C'hoarz sklintin ar joa.

Daoust ha ne deo ket plijaduruz tra³⁵,
Dindan an heol splann, moned d'ar pardon ?
En disheol an telt³⁶, diskuiz hag eva
Ar jistr flour d'ar staoñ ha tomm d'ar galon ?
Diviza laouen a vez greet neuze
'N eru houllonderi boutaill jistr³⁷ stouvet,
Jistr Breiz impentet gand Sant Gwenole
'N amzer dremenet.

Ha ne deo ket c'hoaz dudiuz-meurbed,
Dorojou serret, er goañv, goude koan,
Dond d'en em voda en-dro d'an oaled ?
Ha chom da gonta, e-kichenn an tan,
Marvaillou gwechall, re on amzer-ni,
Hag eva, a-raog mond d'ar gweleou,

³² Avalou api : galleg.

³³ gwenn golo : (notenn gand an oberour) : miz Gwengolo.

³⁴ dour : dourenn an avalou.

³⁵ plijaduruz tra : tra blijaduruz. (evid ar eim !)

³⁶ an telt : an teltennou.

³⁷ boutaill jistr : boutaillad jistr.

Ar “flip“ tomm a verv en eur eonenn
‘Barz ar picherou ?

Kanom a vouez uhel
Gwez-avalou on bro,
‘Zo goeñv ha kreñv evel
Gwez kelenn ha dero.

Mojennou

Ar Wennilienn hag ar Bugel

D'am mestr Fañch Vallée (Ab Herve)

Kannad an nevez-amzer, gwennilienn dremenriad,
Ehan da nijal ha laosk da ziskuiz eur pennad
Da askell duoh eged ar mouar war an drez,
Ha lavar din, gwennilienn, deuz peleh e teuez ?
-Da houlou-deiz, skolaerig, d'ar poent ma oas goueledet
En da wella kousk-mintin, dreist Pariz 'm-eus nijet.
-Braz-kenañ ez eo Pariz ?

-Petra 'lavarez 'ta ?

Evid gwir, diouz an uhel, eo doareet da veza,
Dioh ar pez am-eus gwelet e-barz va beajou,
Unan euz ar re vrasa etre an oll gêriou.
Mez petra ez eo Pariz evidon, e-kichenn
Braster ar bed ? med a-boan 'vel eur gruguill-verien³⁸
Teir munutenn marteze 'm-eus lakaet d'he zreuzi,
Hag asur, anez out-te, ne zoñjfen ken enni.
Euz ar mor don 'm-eus gwelet an tarziou eonennuz ;
War lein menezioù uhel, an erh mezevelluz.
Setu aze traou 'heller lavaroud braz-meurbed,
Ha n'eo ket kêr Pariz war-zu an hini³⁹ e red,
'M-eus aon, da spered yaouank hirio d'ober eun dro.
Selaou ! 'mesk an oll diez a zo berniet eno,
N'ez eus ket, mignonig, nann unan⁴⁰, war va feiz,
E-harz an hini⁴¹ 'karfen diazeza va neiz.
Pegen gwelloc'h eo amañ a-zindan an heol splann,
'Mesk ar gwez, ar glazennou... Anavezoud a ran,
War leveenn⁴² eul lenn sklêr, 'barz an draonienn guzet,
Eun ti-soul en hini⁴³ ez on prest gortozet.
Diwar an treujou 'santer ar c'hwez deuz ar spern gwenn
Hag euz ar bleunioù lireu savet en e gichenn ;
Klevet e vez ar gwenan laouen o safroni,
Balafennou alaouret a ra an dro dezi⁴⁴ ...
Hag ar wreg p'am gwelo o tond a-dreuz an êr
A-denn-askell d'he zoenn, a vousec'hoarzo seder.
Mall am-eus da erruoud. Kenavezo, kêzig.
Bev 'vel m'o-deus bevet da oll dud. Reuzeudig
Ez eo peurvuia, siwaz ! buhez re diwar ar mêz
A ya da glask er hêriou plijadur pe danvez.
Dizamant euz a Bariz, er vro ma'z out ganet,
O ! chom da vervel e-touez kerent ha mignoned.
Va hred, an traou burzuduz 'hellfes gweled eno
Ne dalont ket an êr yah a zeu dezu an neñvo' !

³⁸ gruguill-verien : krugell-verien.

³⁹ an hini : "p'hini" er skrid orin.

⁴⁰ nann unan : galleg : nompas unan.

⁴¹ an hini : "pehini" er skrid orin.

⁴² leveenn = ribl.

⁴³ en hini : "pehini" er skrid orin.

⁴⁴ dezi : ddezañ (an ti-soul).

Ar vezenn hag ar gaerell

D'am Mestr Emil Ernault (Barz ar Goued)

Tomm an amzer. Eur gaerell, eun deiz, a gouske c'hwek
War al leton, en disheol eun dervenn vodenneg,
Pa deuas eur horn mezenn, diouh ar brank distaget
War beg he fri da goueza. Setu-hi dihunet,
Ha, spontet oll, e tered 'n eur daol eur griadenn.
Hogen, eur raz he gwelas, pennfollet, o tremen.
« Petra 'zo en em gavet ? », 'houlennas-eñ outi.
« Gwall-drubillet ho kavan. »

« -Bez' ez oan, eemzi,

Dindan eru wezenn-dero o kousked, goude lein,
Hag eur pikol bod⁴⁵, siwaz ! a zo kouezet war va hein...
Hag, heb chom da echui konta heh abadenn,
E laosk ar raz sebezet e-kreiz ar wenojenn.
Neuze ar raz, mar kredit, a red, ma oar redeg,
War-zu ar waremm dosta da gaoud e amezeg.
« Ne ouzoh ket, Yann Gonifl, pebez nevezenti
A zo hirio c'hoarvezet a-grenn-dost euz ho ti ?
War eur gaerell, eur vezenn, eur pezh gwezenn dero,
Bremaig a zo kouezet ha, flastret, eo maro.
Bez' ez on bet va-unan o weled ar vezenn
Ha, raktal, ez on deuet, va mignon, d'ho kelenn. »
Ember, d'an abardaez, Yannig, o troidal⁴⁶
Dre ar parkeier melchon⁴⁷, 'gavas konifled all
Ha, bodet en-dro dezañ, e tibunas dezo
Istor ar paour-kêz kaerell hag ar wezenn dero.
« ... Ya, bez' e vijeh mantret, emezañ, o kleved
Trouz an dervenn o koueza e-kreiz tan al luhed.
Hag ar gurun o krozal... » 'Tre m'edo o prezeg,
Eur bik an hini⁴⁸ 'n em gave en eur vodenn haleg
E-kichennig, a glevas Yann Gonifl ha, kerkent,
Margod, al lapous begeg⁴⁹ da 'n em lakaad en hent
'Vid skignad dre-oll ar helou : Asur eur hrenndouar
Spontuz-meurbed ha skrijuz 'oa bet, war e lavar.
« ... Evid doare, emezañ, bez' ez eo niveruz
Ar re a zo bet lazeta... » Ar helou truezuz,
D'an antronoz, d'ar beure, a oe anavezet
Dre bevar horn ar hontre. An oll anevaled,
Er parkeier, er prajou, er strouez tro-war-dro,
Beteg memez ar hrevier, n'oa ken kaoz etrezo.
Nag a wech e vez gwelet kelou en on touez
Mond euz an eil d'egile atao war-gresk ivez ;
Rag kalz a dud dibreder a oar o diskuilla
Evel al loenedigou euz ar rimadell-ma'.

⁴⁵ bod : brank (diouz an oberour).

⁴⁶ troidal : o pourmen (hervez an oberour).

⁴⁷ ar parkeier melchon : ar parkadou melchon.

⁴⁸ an hini : p'hini er skrid orin.

⁴⁹ begeg : teodeg (notenn gand an oberour).

Komz re a noaz

D'ar Gall brudet Phileas Lesbesgue

E-kreiz tommder eun devez hañv,
O tond euz a di eun den klañv,
Eul louzaouer, en Aotrou Maze,
War-zu e gêr a zistroe.

Luskellet gand bale reizet
E loen, Maze, hanter-gousket,
Laoske, dre an hent poultrenneg,
'Giz ma kare, mond e gazeg.

O klask eun tamm disheol eta,
Houmañ 'gerze en eur biglamma
Ha hed-a-hed gand eur voger,
Tosta ma helle da ober.

Maze 'n eur zehi e hwezenn
A deuas da zevel e benn
Hag a welas, na pebez gwel !
Eur blokad prun oh an uhel.

Prun dare, melen, marellet
A bikou ruz. Maze, techet
Da gomz oh outañ e-unan,
A zoñje kreñv : O ! emezañ,

« O kaerra prun ! prun dudiuz !
Na c'hwi 'vefe 'ta kennerzuz !
D'ar beajour behiet-meurbed
Gand an tommder hag ar zehed.

Asur, perhenn al liorz-ma'
Ne dafe ket da zinaha
Unan pe diou, pe deir brunenn
'Vid distana va horzaillenn. »

Dre ma prezege evel-se,
O veza greet d'ar Brun⁵⁰ dale,
Maze, 'n eur deuler evez braz,
Gand kalz a boan a zigasas

Goustad e dreid war an diber⁵¹
Hag, harpet mad ouz ar voger,
'Ma en e zao war gien ar Brun
Hag o vodn da gutuill ar prun,

Pa zoñjas adarre, evel
'M-oa e gustum, a vouez uhel :
« Ne ve ket ebat va doare
Bremañ avad ma tegouezfe

⁵⁰ Brun : ano ar gazeg.

⁵¹ an diber : an dibr.

Da dremen amañ eur gadal⁵²
Hag en em lakfe da youhal
(War digarez c'hoari eun dro,
Eun dro vrap din) : Ar Brun, uho ! »

Hogen, ar Brun he-deus klevet :
Sentuz, kerkent ez eo lohet,
Ha 'mesk ar vein hag ar hlazenn,
Maze a ra lamm-chouk-a-benn.

Oll bronduet e izili,
Ar paour-kêz den, gwadeg e fri,
En em zavet gwella ma hell,
En-dro dezañ 'reas eur zell.

Hag e welas e gazeg koz
An hini, war livenn ar foz,
Souezet braz, chomet a-za'
'Zelle outañ 'tond 'n eur gamma.

⁵² eur gadal : eur gwall-baotr.

An daou Vevel hag an Oged

D'an den a lezenn Erwan Fourniz.

Eun devez, eur merour a gasas daou vevel
Da gerhed war o chouk e oged d'ar hovel
El leh ma en-devoa, er zizun dremenet,
He haset da aoza. « Ha kit dillo, paotred
'Vid ma hellim hirio ogeda, emezañ,
A-benn teila warhoaz prajeier Penn-al-Lann. »
Pa weljont an oged, unan ar vevelien,
Lemm e deod, a spered, a reas eur hoar zadenn,
'N eur lavaroud : « Jezuz ! petar zoñje eta,
An ozah pa en-doa on degaset ama' ?
N'eus ket, war an douar, daou zen da zond a-benn
Da zougen war o hein eun oged evel-henn ! »
Egile, eun den kreñv, eun tammig fougeer,
A respontas : « Daou zen ! Ne deo ket re bounner
'Vid eun den ! Va-unan d'he dougen on barreg ;
Va zikourit hepken da zamma ar benveg
Hag e welfot... » E-pad ma kerze daoubleget,
Ar paotr all, eur gwall bez, an hini 'yee dibehiet,
A lavare dezañ : « Souezet-marzo on ;
Pebez nerz ! va zud kêz ; c'hwi a zo eur Samson.
N'em-efe ket kredet, nann, biskoaz kemend-all.
Nann, n'hoh-eus ket ho par e Breiz nag e Bro-Hall.
En em laha 'refot. En an' Doue, lakit
An oged d'an douar ; eur pennad ehanit
Ha va lezit da rei eun taolig skoaz deoh.
« - Tra, tar, eme Yann-zod, kalonekaet muioh
Gand ar meuleudiou eged skuiz gan d e veh,
N'em-eus tamm dienez. 'Vel-se, bezit dineh.
Hag evid diskouez deoh ar pezh 'hellan ober,
Va-unan e fell din he has beteg ar gêr. »
Hag a-benn e teuas, 'vel m'en-doa lavaret,
Beteg ar porrastell da zougen an oged.

Eul lubaner atao oh ouzom a ra gaoud :
Atao 'vez toullet neb a chom d'e zelaou.

An Alhweder, heh Evnigou ha perhenn eur Park

(Da houde La Fontaine).

D'ar skrivagner flour Frañsez Menez.

Na fiz war den ebed nemed war da-unan,
A lavar La Fontaine, ha setu, emezañ,
Ar vojenn a zavas Ezop, pell amzer 'zo,
War ar hrennlavar 'vid e skign dre ar vro.

An alhwidi a ra o neiz e-mesk an ed
Pa deu 'n nevez-amzer da lakaad dre ar bed
An eil deuz egile al loened da dostaad,
Ar pesked er mor don, ar bleizi 'barz ar hoad,
Hag an oll lapoused a glud war ar brankou,
Evel an alhwidi e glazenn ar parkeier.
Unan euz ar re-mañ, koulskoude, a laoskas
Euz an nevez-amzer tremenet eul lodenn vraz
Heb beza c'hoaz heuliet lezenn ar garantez.
'Benn ar fin, en despèt euz he leziregez,
'Reas 'vel ar re all. He neiz d'ar buanna
Aozet, e tozv, e hor, e lak da zifluka
He viou. Hogen, an traou oll a yeas evel-se
Ar gwella ma hellent. An ed a oe dare
A-raog m'oa an torad, deu't mad evelato,
Kreñv a-walh evid nija ha mond da redeg bro.
Ha trubuillet-meurbed, a-raog mond, d'ar beure,
Da hounid dezo boued, ar vamm a lavare
D'he lapoused bihan : « Red eo teuler evez
Hag ober mad ar ged 'pad ma vezin er-mêz.
Mar deu perhenn ar park gand e vab dre amañ
-Hag e teuio, moarvad, hebdale, a gredan, -
Selaouit, emezi. Diouz ar pezh a laro,
Pep hini ahanom buan a ziskampo. »
Kerkent m'he-doa ar vamm kuitaet he bugale,
'Tegouezas mestr ar park : An ed ma zo dare,
Emezañ. Kit, va mab, ha dioustu, da bedi
On mignoned da zond d'on zikour d'e vedi,
Ha d'en em gaoud amañ warhoaz da houlou-deiz,
Pep hini gand e falz. » Pa oe distro d'he neiz,
An alhwerder a gav he horad gwall-spontet.
« O ! mamm, eme unan, bez' en-deus lavaret
Pedi e vignoned da zond, mintin abred,
D'he sikour da vedi warhoaz ar parkad ed.
« -Mar n'en-deus lavaret netra ken a-hend-all.
N'ez eus ezomm ebed da glask eul lojeiz all.
Mez ar mestr, a dra zur, warhoaz a zistroio ;
Red e vo selaou piz ar pezh a lavaro.
Keit-se, bezit laouen ; setu boued da zebri ;
Torrit bremañ ho naon ha kouskit dizoursi. »
Prestig int oll hunet. An nozvez a dremeno.
D'an antronoz vintin n'oa den war an dachenn.
An alhweder en-dro, 'teu ar mestr adarre,

‘Vid an eil gwech, d’ober e weladenn veure.
« An ed-mañ ne dlefe ket beza en e za,
Ha ne dint ket dibeh oh ober heñvel dra.
On mignoned, ‘mezañ. Bet on bet genaoueg
‘N eur lakaad va fiziañs en tud ken lezireg.
Va mab, red eo bremañ mond da di or herent
D’ober deze ar memez pedenn ha diagent. »
Ar spont a zo en neiz gwasoh eged biskoaz :
« Lavaret en-deus, mamm, d’e gerent dond warhoaz.
Deuet eo ar wech-mañ an termen da vond kuit.
« -Nann, nann, eme ar vamm ; va evnigou, bezit
Heb nehamant ebed ha chomit ‘ta en peoh ;
Ha n’eo ket hirio c’hoaz a vo red deom-ni loh. »
Ar wgir a oe ganti. Kar ebed ne deuas
Beteg ar parkad ed. Ar mestr a lavaras :
Neuze o weled se : « Va spered a oa dall ;
En asur, p’em-eus greet kement stad war re all.
Ne ouzoh ket, va mab, petra ‘dleom ober ?
Azaleg dezi warhoaz, kemerom on filher.
Gand tud on ti hepken, on edou a welim
Hag e refom on eost ar gwella ma hellim. »
Ar alhweder, kerkent ma klevas an dra-ma’ :
« An taol-mañ eo avad poent braz da ziskampa.
Bugale, emezi, kerzit war va roudou... »
Ha buan, ha buan, kevred, an evnigou,
Oh en em eilpenna, ‘barz ar hlizenn-vintin,
A zilojas oll heb trompill na taboulin.

Laer laeret

D'ar Markiz An Estourbeillon (Hoel Bro-Ereg)

Eun den a-zoare dister a-walh da weled,
Dirag stal eur marhadour dillad koz, 'oa chomet
Da zelled eur pennadig. Pa drouz en e benn
Antreal e-barz an ti, e touge eur chupenn
Kazi nevez, war e vreh. Goulenn 'reas raktal
Digand ar marhadour : « Pegement, hep chipotal,
E kinnigfeh d'an Aotrou, euz ar wiskamant-ma' ? »
« -Va den mad, ho kwiskamant ne dalv ket kalz a dra,
Eme ar hoz marhadour, en eur ober ar van
Da zelled gand dispriz ouz ar chupenn ; mar roan
Ugent real eviti, e rafeh, a dra zur,
Eur marhad meur talvouduz.

-Daoust hag eñ c'hwi 'zo fur ?

Pe goap a rit diouzin ? Eun hevelb chupenn
A dalv evid pep hini ugent lur pe ouspenn. »
« -Ugent lur a lavarit ? Mar prenfen kemend-all
Chupenn e-giz houmañ, 'hellfen serri va stal
A-benn nebeud a amzer. »

« Lavarit din eta,

M'ho ped, Aotrou, pehini eo ho ker diweza ? »
« Evel 'm-eus deoh lavaret, ugent real, ha c'hoaz
E vefe evid ober plijadur deoh, siwaz ! »
« -Ha koulskoude mar 'pefe ar chupenn da werza,
Ne houlennefeh ket outi daou skoed d'an nebeuta ? »
« -Mar he gwerzfen, va mignon, daou skoed, me a gredfe
Em-efe greet eur marhad mad dreist-oll war ma fe'. »
« -Mad-tre ! 'me an tremener ; kemerit ho taou skoed ;
Me a gemer ho chupenn. »

« -Petra 'h-eus lavaret ?

Va chupenn ? »

« -Na petra 'ta ? Deoh-c'hwi eo, aotrou kêz.

Distaget 'm-eus anezi diouz ar hrog 'zo er-mêz.
Hag en ti on antreet evid gouzoud he friz ;
Rag summ euz ho kwiskamant a blije din iskiz.
Ha peogwir evid daou skoed e rit eun afer vad,
E hellom beza laouen on-daou euz or marhad.
Kenavezo, trugarez ! ho kuitaad a rankan. »
« -Ola ! ola ! gortozit ! » youhe, kounnar ennañ
Ar marhadour o redeg war-lerh ar prener fin.
« An dra-ze 'zo laeroñsi. »

-« Evel deoh e larin »,

Respontas dezañ hemañ. – « Eul laeroñsi ervad,
Eo merka daou-ugent lur, 'vel ho-peus, va den mad,
Hen greet war eun tamm paper, gand eur spillenn staget
Ouz eur chupenn an hini, bremañ, prizit daou skoed. »
Hag, heb chom dale pelloh, e tehas va homper,
Sederet-braz o veza touellet eun trompler.

Al louarn hag ar bleiz

D'an Drouiz Meur Erwan Berthou (Kaledvouc'h)

Alanig⁵³ al Louarn, en em gavas eun deiz,
Diwez an abardaez, gand e gomper ar Bleiz,
'Tal eur ster goloet a skorn. Dre ma reent
Kompagnunez o-daou oh heuill ar memez hent,
Alanig a glaske, 'n eur gonta marvailloù,
Penaos 'hellfe c'hoari eun dro vrag da Willou ;
Rag, a-bell 'zo, en-doa outañ kasoni.
Tost d'ar ribl, e welas eun toull braz an hini
'Oa bet kleuzet er skorn gand an dud diwar-dro.
An toull-ze, 'pad an deiz, a zervije dezo,
'Giz eur puñs, da denna dour evid o loened.
Hogen, e-pad an noz digoumoul, yen-meurbed,
En em stouve an toull gand ar skorn a-neve'.
Ar henta degouezet d'ar ster hen distouve
Hag, e labour echu, e laoske war ar skorn,
'Kichenn an toull neuze dizolo, ar helorn,
'Vid servij d'ar re all. Al Louarn a redas.
Pleget a-uz d'an toull, d'ar Bleiz e lavaras :
« Ha plijoud a ra deoh pesked ispisial ? »
« Netra koulz da zebri ne gavan ; me 'vo dall
Mar lavaran eur gaou », respont ar Bleiz.

« Setu,

'Me, Alanig kerkent, e tegouez deom an tu
D'ober pesketadenn dispar a ziliou. »
« A zo mad ! Petra 'ta, a houlennas Gwillou,
D'az sikour da dapoud e ve red din ober ? »
« Eun tammig pasianted hag eun nebeud amzer.
Ouz daouarn ar helorn, va lezit da staga
Ho lost, ha goude-ze n'ho-pezo ken netra
D'ober, nemed, kluchet war bord an toull, lezel
Anezañ da skourra war muioh-mui izel,
Ha dre-ze ar helorn a ziskenno hep stroñs,
Hep glabousad nemeur an dour, beteg ar foñs.
Mez, Aotrou Gwillou kêz, daoust ha c'hwi a hello
Gouzañs gand pasianted ar yenienn haro ?
« Farsal a rez, moarvad, Alanig ? Gra founnuz,
Rag naon braz am-eus. » Al Louarn, dilloüz,
A stagas lost ar Bleiz 'vid, dizale, redeg
'N em lakaad er goudor dindan ar gwez haleg.
« Eun ali diweza, 'me c'hoaz an ibil fall :
War digarez ebed diwallit da fiñval ;
Ar ziliou 'dehfe euz an toull heb distro
Hag e hellfem lared d'or hoan : Kenavezo !
Bezit atao dineh. D'ober ar ged ez an... »
Hag o veza komzet en doare-ze, Alan,
Gourvezet, e fri war e dreid astennet,
'Chom da zelled ouz ar Bleiz a-vremañ reviet.
Tremen 'ree an amzer ; netra er zaill, avad,
Hag ar bkeiz 'zoñje 'n-defe a galon vad,
Laosket eno ar zaill hag he fesked an diaoul,

⁵³ Alanig : lesano al louarn (notenn gand an oberour).

Ken tizet 'oa e lost gand ar riou 'barz an toull.
Mez en despet d'e boan, rag aon ar goaperez,
E kendalhe bepred gand e besketerez.
Hag e-pad se ar skorn, en eur zond tevoh c'hoaz
Tro e lost, eñ a waske evel e-barz eul las.
Koulskoude, 'barz an neñv, e teue an dremmwel
D'en em sklêrijenna. « Alan, n'ema ket pell
Ar mintin, 'lavaras ar Bleiz. Ar poent a zo
Deuet da voned kuit ahano ? War va meno,
Ar zaill a dle beza leun-mik a ziliou,
Rag va lost a zo ken pounner, eme Gwillou,
Ma ne hellan ket he loh. »

« Gortozit eta c'hoaz

Eur pennadig bihan : ne vezo bet biskoaz
Heñvel peskadenn ! » a respontas ar gadal⁵⁴.
Klevet 'veze dija ejenned o vlejal
Hag eur hillog o kana e halv da houlou-deiz,
En eur gêrig demdost. Bepred, war lost ar bleiz,
Ar skorn 'starde gwasoh. —« Va zikour da zacha
En diavêz an toull an tanfoeltr kelorn-ma' .
Kaer 'm-eus ober, ar zamm 'zo re veh evidon »,
'Lavaras adarre Gwillou. « Skuiz-marzo on.
Hast afo, Alanig, trouz botou a glevan
O tond war-zu ennom. Red eo tehed ahann,
Ha buan, ha buan. »

« Gwall boent eo dispaka,

A dra zur, 'me Alan. Ez an da gimiaada
Diouzoh war gement-se. Komper, kenavezo !
D'ar henta, va mignon. Sant Per d'ho sikouro ! »
Ha war ze, herr ennañ, 'vel eur had e redas.
O krena gand an aon, ar yenienn, siwaz !
Ha kounnaret dreist-oll, ar bleiz neuze lakaas
E oll nerz da êsa dibrada ar helorn,
Ha distaga e lost. Siwaz dezañ ! ar skorn,
Kreñvoh egetañ, a zalhe krog. Eur vandenn
Tud gand chas a deue diwar lein ar grehenn.
'Trezekañ, hag, er gwel ar paour-kêz aneval
Luziet ha tregaset, 'n em lakajont da youhal :
« Harz ar bleiz ! Harz ar bleiz ! Kis, kis, kis ! » Hag ar chas,
O harzal a-bouez-penn warnezañ a zaillas.
Ar wazed, euz o zu, gand o zreid-fouet kelenn,
Hen skourjeze ; ar gwad a ruzie e grohenn.
Unan euz ar gouërien, dre zegouez, a zouge
Eur gontell ouz e houriz, seurt gourgleze,
E-barz eur gouin ler. He dihouina reiz
Hag he savas evid peurechui ar bleiz
Hanter-varo dija, pa risklas war ar skorn.
Ar gontell, dre eurvad, a strinkas dioh e zorn
Hag, o koueza war lost ar bleiz, e drohas krenn.
Hga heb chom, mar kredit, da houlenn tra ouspenn,
Gwillou a red, a red, o laosk eno on zud
Sebezet-braz dirag eun heveleb burzud.
Setu-eñ savetaet, Doue ! en pebez stad !
Oll bronduet e gorv, e zae rouz leun a wad,
E lost kollet er stourm... Hag, o vond gand an hent,

⁵⁴ ar gadal : an hini gadal. Amañ : ar gwall-baotr.

Ar bleiz ar hroz mole en eur skrigna e zent :
« An devez-se, m'hen tou, 'vezo dit reuzeudig
Ma tapin kruz ennout, va mignon Alanig ! »

Raz ar parkou ha Raz-kêr

Troet ger ha ger diwar Horace

D'ar Helenner Kletieg Per ar Rouz

Gwechall, Raz ar parkou a bedas ar Raz kêr,
E gevareg⁵⁵, da zond da bredda en e gêr.
'Vitañ da veza tost⁵⁶ ha d'e-unan kaled,
N'eh esperne netra evid degemeret
E gamaraded koz. Erruet en devez
Divizet etrezo, reñket an tiegez,
Goude beza skubet gand evez ar leurzi,
E ledas eur gwiskad kolo fresk warnezi,
Hag e lakaas dirag e vignon 'n em gavet⁵⁷
Ar gwella euz an traou en-devoa dastumet :
Greun kerh ha piz-bihan, rezin seh, tammouigou
Kig-sall hanetr-grignet ; goude, en e henou
E tegasas dezañ fourmaj ha kraoñ-kelvez.
En eur gemma ar goan, e klaske, ar raz kêz,
Beza treh war an heug euz eun ostiz figuz,
Na daole war bep tra 'med eun dant disprizuz,
Daoust da ze e-unan, mestr an ti koulskoude,
'Vid lezel an traou mad d'ar hêriad, ne zebre
Nemed heiz ha dreog. « Peseurt plijadur 'ta,
Eme neuze raz-kêr, e kavez o veva
'Mesk ar reier uhel, war gostez eur menez,
'Kreiz ar hoajou teñval, e-barz an dienez !
Va hred, va hevareg, deus ganen beteg kêr :
Eno 'vez ebatou, festou en peb amzer.
Peb den, war an douar, a rank mervel d'e dro,
Ha na braz na bihan ne deh diouz ar maro.
Setu perag, e-pad ma hellez, va homper,
O soñjal pegement ar vuhez a zo berr,
Eo red dit kemer lod euz an traou dudiuz
A zo e-barz ar bed ha beva evuruz. »
O kleved kement-se, laouen-braz, ar mêziad
'Lampas er-mêz e doull evid heuill ar hêriad.
Ha setu int o-daou, kevred, da foeta bro,
Ha buan ha buan, rag c'hoantaad 'ree dezo
Goid kêr 'pad an noz dre zindan ar muriou.
An noz a yee dija da guitaad an neñvou
Pa 'n em gavjont e-barz e sal vraz ar palez
El leh ez oa chomet, da houde eur banvez,
Restachou niveruz a-wel da zegas c'hoant,
Hag o vogedi c'hoaz e-barz plajou arhant.
Ha neuze ar raz kêr, o veza greet dioustu
Azeza e breder war eur pallenn mouk-ru',
A zervij dezañ meuz war veuz 'n eur o zañva,
Evel eur blasaer, e-unan da genta.
Ar houër a vennige, seder, e stad nevez
Hag, en eur zebri c'hwek, 'hoarze el levenez.
Souden, trouz dorojou o lakaas en o za,

⁵⁵ E gevareg : e vignon. Marteze « e geñvareg »

⁵⁶ tost : tost-gagn.

⁵⁷ e vignon 'n em gavet : e vignon a zo o paouez en em gavoud gantañ.

Hag o-daou da redeg o klask en em denna,
War-grenn, hanter-varo gand ar spont krog enno.
Na kogn ebed na toull-kuz en nebleh evito ;
Gand harzadou ar chas an ti braz a ziston.
« O ! ‘me raz ar parkou, pebez taol evidon !
N’eo ket ar vuhez-mañ eo a fell din avad.
Beza yah hag evuruz. Kenavo ! kamarad.
Distrei ‘ran d’am zoull ‘leh ‘tebrin adarre
Va fiz-bihan korneg e-barz ar zurente’.

Salud digoridigez ar Gorsedd en Uhelgoad

D'an 19 a viz Eost 1920

(Balgan⁵⁸)

‘Vid tremen di an hañv, eur hornig koant e-touez
Re goanta Kerne eo asur Uhelgoad,
War ribl al lagenn hlaz, gourizet gand ar gwez,
Bleuenn euz an Arez, Rouanez an Argoad.
Skol ar Varzed, hirio, amañ en em zerret⁵⁹
A zeu d’az saludi, o ! kêr ken karadeg !
Trugarez d’on beza ken mad degemeret
E bro ar hoajou braz, an troniennou meineg.

Trugarez ! Aotrou Mêr, ha deoh oll, Aotrounez,
Ho-peus on skoazellet evid aoza lidou
Ar Gorsez er bloaz-mañ, war gostez ar Menez.
Gand anaoudegez vad e trid or halonou
O weled en-dro deom kemend a dud bodet.
Ha trugarez ! dreist-oll, d’on hendirvi gelteg,
Euz an tu all d’ar mor, d’or pedenn deredet
E bro ar hoajou braz, an traoniennou meineg.

Trugarez ! deoh ivez, priñsezeg grasiuz⁶⁰.
Evel evnig ar hoad pa darz an heol-mintin,
Dirag ho koantiri, ho mousc’hoarz azeuluz,
Eur zoñjezon dener ennom a gan lirzin.
Oh ho kweled ken fresk en ho tillad flouret,
Eh hetom, d’ho skwer vad, gand ar yez vrezoneg,
Giziou on tadou-koz bepred ra vint miret
E bro ar hoajou, an traoniennou meineg.

Kas

Gand doujañs, saludom ar Gorsez digoret⁶¹,
Rener ar Republik. Unanet ha kevred,
Youhom oll a-bouez-penn evel tud kaloneg :
« Bevet Bro-Hall ha Breiz, er bed oll enoret !
Ha bro ar hoajou braz, an traoniennou meineg ! »

⁵⁸ Balgan : gwerz.

⁵⁹ amañ en em zerret : amañ bodet tud ar Gorsez.

⁶⁰ priñsezeg grasiuz : Rouanezed Kerne (notenn gand an oberour).

⁶¹ saludom ar Gorsez digoret : Kement-mañ evid senti ouz giz koz ar Gorsez, a
hourhemenn saludi Penn-Rener ar vro (notenn gand an oberour).

